


Un taol-lagad war anvioù parkeier Langoat



Ar 4625 anv-lec'h Langoad , parkeier, tiez, hentoù, gwazhioù, plasenoù ... renablet er c'hadastr 1836 , kentañ hini savet en un doare reizhiadek, a ro deomp un tañva eus mont en-dro ur gevredigezh diwar ar maez, eus he frammoù ..

Anvioù zo a c'hell dont eus a bell amzer : Lod oute kavet en dielloù (paperajoù noterien ar 17vet, renabloù goude marv, lizhiri koumanant pe feurmiñ ...) Lod all n'int ket ken kozh all hag e tennont d'an adframmañ parkeier, hentoù, gwazhioù ... Menajoù zo a cheñch o anv gant ma vo cheñchet ar menajer . Ar parkeier dre vras a vo miret o anv orin gante , gant ne vefont ket adframmet pe lodennet : *Park ar gleud* er renabl 1836 a oa dioutañ dija e 1733 evel un toullad eus ar re all..

Ar c'hadastr 1836 eo kentañ hini a ziazez dre skrid an holl lodennoù douar ar gumun, en a-raok ne oa nemet skridoù hiniennell diwar menaj-mañ-menaj . Da-heul levr ar c'hadastr e vo savet an eil: Hini ar berc'henned hag a vo astennet, kresket ha kemmet bep gwech hag a vo ur cheñchamant perc'henn , koumanant pe feurm, ennañ pep lodenn douar pe ti renablet diwar an daveoù 1836 . Er re-mañ e kaver kemmoù iskis (nesañ --> an essor): Un diforc'h bras zo etre ar renabl orin e 1836 hag hemañ : hini 1836 zo diazezet diwar ar c'hlevout, da lavarout ar pezh a zo bet lavaret gant pep perc'henn pe menajer padal an eil zo diazezet diwar ar skridoù kent (gant kemmoù o tont eus an diaezamant lenn , gwechoù zo ar memes ger gant skrivadennoù disheñvel ..) Kement-mañ a lak ac'hanon da soñjal eo gwelloc'h ober gant ar renabl 1836 , hemañ keñveriet , kement hag a zo tu d'en ober, gant titouroù kent .

Diluziañ ster an anvioù-lec'h zo aes awalc'h evit 90% oute: Dre rummadoù, meur a wech ar memes ger , o sellout ouzh o stumm war kartennoù o vont gant ar renabl .. Evit an 10% a chom eo un afer all... Al lodenn vras oute zo o-unan ha n'ez eus nemet unan oute.. gant un doare skrivañ daouhanter: ar skrid o tont eus ar pezh a glever (gant ma vo distaget sklaer ha klevet ken sklaer all war an dro) diouzh an tu , ha da eil gant un doare-skrivañ na gall na brezhoneg . Un toullad brav eus an anvioù a denn evel-just da vuhez micherel al labour-douar (Logell Beg soc'h) gant doareoù ober aet da get (marradegoù, plomadegoù..)(Lann zuil), lod all da darvoudoù resis hag hon eus roud ebet dioute (Park Jolori , Park forban ...) hag un toullad brav astennet gant anvioù tud

Klasket a vo dirouestlañ tamm pe damm an dachenn met dav eo gouzout e vo alies martezeadennoù ha gwech ebet un dielfennañ a-dra-sur ...

Kroget e vo gant un taol lagad hollek war al lodennoù-douar : park, logell, liorz, prad, gwezeg,Ar re-mañ ar muiañ kavet er renabl, evit mont da c'houde gant rummadoù gerioù zo : leur, feunteun, gwazh, gardenn ha hentoù, o tennañ d'an dour, perzhioù douar, anvioù-familh ,plant, loened, ... ha klozet e vo gant ar re chomet war-lerc'h.

Renkamant ar studiadenn

An dibab a zo bet graet eo mont dre ziskenn a rummadoù anvioù : renabliñ ar penn gerioù : park, logell, liorz, prad, ... hervez o niver : ar re-mañ zo tachennoù-douar

anv	niver	gorread	keidenn	Priziadur hollad	Priziadur keit
park	1018	7429732m ²	7298,36m ²	19047,75 f	18,71 f
logell	505	1451594m ²	28,74m ²	3692,18f	7,31f
liorz	371	2597882m ²	7002,37m ²	8675,17 f	23,38 f
prad	331	1488250m ²	4496,22m ²	3826,94 f	11,56 f
maez	119	730140m ²	6135,63m ²	2022,7 f	16,99 f
Lann (labour)	101	582120m ²	5763,56m ²	932,56 f	9,23 f
tachenn	90	261100m ²	2901,11m ²	583,5 f	6,48 f
Lann (gwrac'h)	62	273090m ²	4404,67m ²	193,03 f	3,11 f
koad	54	226520m ²	4194,81m ²	359,12 f	6,65 f
Kloz	38	219990m ²	5789,21m ²	754,84 f	19,86 f
Gwezeg	29	9570m ²	330m ²	19,09 f	0,65f
Lostenn	18	28190m ²	1566,11m ²	72,17 f	4 f
Drezeg	11	99860m ²	9078m ²	280,33 f	25,48 f

Bez ez eus lodennoù all, ken niverus all : jardin, kourtil, leur, plasenn, gardenn met n'int ket tachennoù labouret...

Tachennoù-douar all, bras pe bihan, ha ne gaver o anv meneget nemet ur wech pe un toullad gwechoù zo...: erv, brandoneg, menneg, morgoadha meur a hini all a vo sellet diute tamm ha tamm en ur vont gant ar studi .

A eil renk en anvioù al lodennoù-douar (klokaenn an anv) e kaver tremen alies anvioù-tud pe kefredioù zo : ur rann vo gouestlet d'o studi ...

notenn: implijet e vo ar ger " Lodenn" evit komz eus forzh peseurt tachenn-douar e vefe - park, prad, tachenn, logell, kloz ...- evit komz en un doare hollek eus ar parkeier dre vras . (ar ger lodenn ne vez kavet nemet ur wech).

Un taol lagad war douaroù Langoad e 1840, renket hervez reolennadurioù ar c'hadastr, ar re-mañ zo tailhus...1762,94 hektar diwar an 1800,05 hektar eus ar barrez. War bouez 4% eus ar barrez eo labourer an holl douaroù (gant doareoù disheñvel met labourer).

Rummad	Gorread pe niver	Talvoudegezh en holl	% eus an douaroù
Douaroù labour	16970890m ²	46309,5f	96,26%
Lanneyer	38500m ²	265,17f	2,18%
Stankoù	10520m ²	10,52f	
Koadoù bod	54210m ²	73f	0,03%
Koadoù savet	73390m ²	83,42f	0,04%
biez	5150m ²	3,13f	
Tiez	581 ti	4152f	
milinoù	12 milin	325f	
gwazhioù	52 gwazh	177,50f	
Kleuzioù zo, gardennoù, hentoù prevez , antre...	130240m ²	520,96f	0,07%
En holl	17629400m ²	51920,20f	

Gorread an tiez (gant ar porzhioù, ar jardinoù, ar c'hourtiloù..., ar milinoù hag ar gwazhioù a gas da 346500m². (1,9%)

581 ti (savadur gant tud o chom e-barzh met ivez savadurioù maen all : kevrier, kouldri, skiberoù, grañj e maen,...) kement-mañ evit 469 familh hag ur boblañs a 2349 annezad e 1836 . 108 oute a oa menajerien (da lavarout o terc'hel un ti-feurm, perc'henn pe dre lizher). Tro-dro d'ar re-mañ e oa labourerien, kenstag ouzh ur menaj bras o chom en tiez distag diouzh an ti-feurm , un tamm park pe logell gante peurvuiañ. E pep menaj e oa mitizhien ha mevelien : hervez ar renabl poblañs 1836 eo oa : 108 menajer gante 157 mitez ha 148 mevel ar re-mañ o chom en ti-feurm . Niver a vevelien e pep ti-feurm a oa diouzh ment ar menaj , bugale deuet pe get gante... Devezherien a oa da c'houde o feurmiñ o labour diouzh an ezhommoù war ar maez ha gante an holl micheroù a oa ezhomm kaout : gwiader, kemener, kiger , fornier, troer-koad, piker-mein, toer-plouz pe toer mein-glas, kordenner,.....

Diavaez tailhoù

Anv	gorread
presbital	2620m ²
Iliz ha bered	4690m ²
Hentoù ha plasenoù	757290m ²
Sterioù ha gwazhioù	81070m ²
Aod	25920m ²
	871590m ²

Da servij da dañlenn

- 1- Park
- 2- Logell
- 3- Liorzh
- 4- Prad
- 5- Maez
- 6- Lanneg ha Lann (gwrac'h)
- 7- Tachenn
- 8- Koad
- 9- Kloz
- 10- Gwezeg
- 11- Iostenn
- 12- Drezeg
- 13- Gwazh
- 14- Poull
- 15- Erv
- 16- Gwerje
- 17- Kleuz
- 18- Tosenn, Kog, Roz, Run Krec'h, Bronneg, Kra
- 19- Gardenn, Antre, Hent, Isu
- 20- Milin , Stank
- 21- Ti, Loch, Kastell, Kouldri, Ospital
- 22- Leur
- 23- Kourtil, Jardin
- 24- Feunteun, Puñs, Dour

25- Porzh, Forn

26- Mengleuz, Mein, Meineg, Roc'h

27- Plasenn

28- Kroaz, Kroashent

29- Pont

30- Iliz, Chapel, Ar Sant

31- Perzhioù an douar (gleb, dourouet, gouer, kailhar, gwrac'h, fall, sec'h, touilhad, loued, "yan", moudelek, aven, grouez, tirien, daou hanter, poazh, dour, plat, bouilhenn, skorn)

32- Kev

33- An aod

34- Morgoad

35- Traonioù, Traouieroù, Gwern

36- Brandon

37- Stummioù al lodennoù douar (kamm, don, gwagonek, begek, treuz, prenestr, barr, "skroeñc'h", kilpenn, bour,)

38- Heñvel ouzh .. ostilhoù ... (marr, lavregenn, koubloù, beg soc'h, kloued, kavell, skaller , broud, loaioù) Marradeg, Plomadeg (bos, devet, plom, suilh)

39- Plant

40- Loened

41- Anv tud e karg pe micheroù

42- Anvioù-tiegezh

43- E galleg

44- Gant fent

45- N'ouzer ket

46- Pennad klozañ

1 - Park

Bez ez eus 1018 daveenn o kregiñ gant ar ger "park" met ne gaver gwech ebet ar ger "park" (pe gerioù "ar park") e-unan .Bep gwech ez eo resisaet gant ur ger pe ur rummad gerioù kenstaget outañ.

Diwar an 1018 "park", al lodenn vrasañ dioute zo douaroù-labour (975), lod all prajeier (9), lod paturioù (24) ha lanneier (10) . Keidenn an tachennoù "park" a zo 7298m² a c'horread gante evite ur priziadur uhel da 18,71f (nebeutoc'h hag an drezegoù, al liorzhoù pe ar c'hlozoù - 25,45f -23,38f, ha 19,86f). 29 oute a ra ouzhpenn 3 devezh-arat met al lodenn vrasañ dioute a zo etre 1 ha 2 devezh-arat (627 evit bezañ resis).

Astennet eo ar "park" dre meur a stumm:

- gant anvioù loened : Ar marc'h, oc'h, an tarv, kezeg, bleiz, ...
- gant anvioù plant : spern , baelan, burlu, halleg, kistinnoù, pabu, kelenn(où) , raden , skav, ..
- gant anvioù gwan pe lec'hiañ: bihan, bras , an traoñ, dialaez, hrec'h, kreis, uhellañ, izellañ , meur, moan, nevez, pellañ, tostañ, nesañ , pell, drek, besk, beskelloù, kamm, korn(ek) , don, hir, treuz, ...
- gant anvioù o tennañ d'ar douaroniezh, d'an endro : an aod, ar menez, an pave, ar blasenn, ar pont , ar poull, ar vilin, ar stank, ar vengleuz, ar chapel, an hent bras, ar groaz, an div wazh, an dosenn, ar c'hardenn, ar c'hra, an iliz, an isu , ar c'hroazhent, ar c'hleuz nevez, an dour,
- gant anvioù tud : Boulanjer, An Abad, An eskob , Allain , Ar Belleg, Ar beskont, Beleyen , Ar floc'h , ar Gall, An gorreg, An Itron, Al leanez, Ar mogn, An penneg, Ar veo, Ar rinviere, Ar Rouz, Antoine, Boudier, Bourhis, kadiou, Capitaine, Kariou, Chalonied, Moazan, Kozhaned, Konan, Kloareg, Koadalan, Denez, Dom ÿan, Jelard, Floc'hig, Even, Gwilhou, Hamon, Michel Huon, Guiomar, Job, lagadeg, Marc'harid, Maodez, Mari, Mari Poullazen, Mari oueno, Mari Vod, Mengi , Olier, Omnez, Person, Rannou, Raymond , Raoulig, Stefan, Vinçant, Tregrom, Rene Huon, An Marrec, An Arvor, Ar Brun, An Deu, Korle, Kotel, Salpin, Moal, Morvan, Peron Pezron, Barac'h, Tremel, Loued, Andrev, Foricher
- gant anvioù koumanantoù :Josse
- gant anvioù keriadennoù : Kambleg, Kericun, Kastell Pik, Pontreo, Koad Mahe, Koatreven, Darval, Dimezelled, Gwazh an Pik, Lezderrien, Kergarig, Kerhualo, Keris, Kerivoallan, Kerlast, kerlivy, Kermorvan, Kerverziou, Kervin, Kervosquer, Kervot, Langoad, , Marjili, Runolen, St Tremeur, Trohorre, Traouroud, Berc'hed, Trevenou, Kerlider, 4vents, An Amour, an Normanted, Kergall, Kernabat, Keruzadoù, Poull an hae, ...

- gant anvioù o tennañ d'ar menaj : feunteun, an mur, ar wazh, al loch, al leur , ar porzh, ar puñs, an ti-douar, an ti-pri, ar c'houldri, an alez, ar forn, al liorz, ar prad, maez, ar porastell, ..

-gant anvioù o resisaat an implij : ed-munud, kerc'h, kaol, foenn, lann, pilienn ,kash (patatez)...

- gant gerioù o resisaat pezhioù an douar : fall , gleb, drezek, mein,, mein gwenn, mein glas, moudelek, plom, kevioù, sec'h, yan, roc'helloù,

- gant gerioù all : al Lonkañ, gwin, merc'hed, pask, skalier vin, forban, ar sal, skalier vin, glerioù, jolory, joaic, malarje , postoù-mein, skalier maen,

Er c'hadastr ne gaver nemet ar pezh a zo tailhus ha dre anv ar parkoù (evel evit al logelloù) e weler niver ar fornjoù ; feunteunioù, punsoù, ...

En dielloù an departamant ez eus tu da gavout meneg eus anvioù parkeier zo : dreist holl er "skridoù goude marv" . Dav 'vefe ivez lakaat e fri en dielloù an noterien...

Parkeier zo a oa dioute dija e 1719, e 1733, e 1740 : park faou, park an gleud , park drezek, park ar c'hra, park an levried (levriot), park ar marc'h , parc an jourged (jourgot jurget), park al loch bras, park an aod, park ar c'hoad, park raden, park lukaz, park bihan kreiz, park Fromal ,park mari ar borgn, park an ospital (en araok park isaie??) ...

Un nebeut all n'o deus roudenn ebet ken e 1836: park an arher, park an ogneret, park an douartel (douar teil?) park mezerel (park maez erel) , park an prastel

2- Logell (loguel er renabl)

Diwar ar 505 lodenn-douar anvet "logell" 481 oute zo douaroù-labour , ar re all a c'hell bezañ lanneg, mengleuzioù , bodoù-koad, prajeier pe paturioù (peouroù) . N'int ket tachennoù douar bras : 2874m² ac'hane (gorread keit) ha priziet divalav (7,31f dre geitenn).

Ne vez kavet nemet 6 gwech an daveenn "al logell" (an logel) hag al liester "logelloù" 9 gwech o-unan er renabl kadastr 1836. Ar re all zo astennet gant gerioù o resisaat o lec'h, pe perc'henn, pe ment, pe implij, pe diouzh o stummLod dioute a chom tamm pe damm digomprenus...

E liamm gant ul lec'h : logell feunteun gwareg, ar c'hoad (16 gwech) , quatre vents, an alez, ar c'houldry, ar barrier, ar bern, ar groaz(9 gwech), an dossen (6 gwech) , an antre, ar forn (8 gwech), ar wazh (10 gwech) , ar c'hardenn (8 gwech) ,an hent (15 gwech), ar c'hra (2 wech), an isu (2 wech), al loch, al lann (14 gwech), ar pont, ar porzh (3 gwech), ar prad (4 gwech), ar skluz(2 wech), an traoñ (5 gwech), an ti (2 wech), ar vilin, chapel, ar c'hroas-hent, drek an ti (6 gwech), al liorz (3 gwech), maez (5 gwech), ar park (15 gwech), presbital, stankoù, an aod

E liamm gant hec'h implij pe ur perzh hewel : kistinenn, kelenoù, mein gwenn (8 gwech), maout, irvin, drezek, dewet, kanab, broc'h pe broc'hed, beg souc'h, an dilhenn, kezeg, perenn, an dour (8 gwech),an bent du ,an cooën , ar c'haol ,an avalenn avalennoù, an heskenn(4 gwech), piz, marveilh ,an fichelen , an kouch, mendu...

E liamm gant menajoù pe keradennoù pe vefe anvioù tud : an aotrou, an amour, koailh, an escob, ar floc'hig, an ospital, an c'hwerv (huerou), an iliz, an rouz, ar veo, antoine, ar faou, balkou, beleg, beleyen, boulanjer, bozeg, brelevenez, koad ar roc'h, Koad mac'he, kozh karadeg, kozhaned, stalaff bihan, gwazh an pik, gwazhkev, gouriou, gwilhou, gindi, kerankrec'h, kerc'hroso, kericun, kerlider, kermari, kersaozon, kersaliou, keruhalo, kervosquer, kambleg, marjili, marie yoeno, crec'helan, minter, morvan, allain, pont azen, pont goter, pontreo, porzh braz, raleg, savean, rufinic, run garv, stalafennou, talgwenn, tangi, sterenn, tili, tok gris, ti breder, ti bras, paol, quatre vents ,an tort, ar born, gweganoù, gwillard...

hag un toullad anvioù all skrivet evel kavet ha lennet : an énan, , an hi nor, an huanen, an loyau, an neften? , , beligogne, boutanus?, culater/c, ervoan, , jamin, jol, lachès, mobily, mohet, perichon, platte, scornen, tosq gris, guielen, ...

En dielloù kosoc'h e kaver anv eus logelloù zo : Logell an gallez, logell milin...,Logell keriliz, Logell ar groaz,..ha n'o deus ket kemmet o anv...

3- Al liorz

Ur wech tennet an daveoù ha n'ez int ket douar labour e chom 371 lodenn renablet gant ar ger « liors ». Ar re a zo bet dilammet ganin a zo renablet en ur vezañ bod (taillis) lan n(lande) prad (pré) leur (aire) pe c'hoazh kourtil (courtil) da lavarout 18 daveen . Gorread an 371 « liors » a gas da 2597882 m² (14,74 % eus holl douaroù Langoad : da lavarout pep tra ha n'eo ket ur savadur-mein (ti, milin, gwazh ...), ar pezh a gas d'ur geidenn a 7002 m² evit ul liorz hepken . Diouzh an daolenn savet amañ dindan e weler diforc'hioù bras kenetreze pe vefe e keñver o gorread pe vefe diouzh o zalvoudegezh evit an tailhoù .

Ar pemp brasañ hag ar pemp bihannañ

36930 m ²	A 499	Liors bras
22150 m ²	A 995	An liors
20150 m ²	D 1092	Liors allain
19090 m ²	A 534	Liors an bourg
18030 m ²	C 1036	An liors
1700 m ²	B 785	Liors bian
1200 m ²	B 446	Liors bian
1200 m ²	C 425	An liors
600 m ²	A 578	Liors
580 m ²	C 259	Liors gourhan

Talvoudegezh an holl liorzhoù a gas da 8675,17 lur da lavarout dre vras da 23,38 lur evit pep hini dioute hag ar pezh a zalv 18,35% eus talvoudegezh holl douaroù Langoad. An dalvoudegezh zo jedet gant paotred ar c'hadastr diwar ur feur embannet evit pep lodenn (etre 1 ha 5), ar feur-mañ sanset priziañ an douar .

132,9 lur	A 499	Liorzh bras
84,41 lur	C 581	Al liorz
76 lur	A 534	Liorzh an bourg
60,6 lur	D 1092	Liorzh allain
60,12 lur	A 676	Liorzh olier
6,2 lur	B 448	Liorzh an leur
5 lur	A 581	Liorzh dreg an ti
4,8 lur	B 446	Liorzh bihan
4,73 lur	C 418	Al liorz
4,17 lur	C 483	Al liorz
2 lur	A 578	Al liorz

138 gwech e vo kavet an anv « an liors » e-unan , ur wech « liorzen » (B 713) hag ur wech all « liorzou » (B 465) . Merkout a ra pouez pennañ an dachenn-douar-mañ er menaj . Gant an 231 « liors » all eo resisaet ar ger :

Pe gant un anv gwan hepken : *Liorzh bihan* (13 gwech) *Liorzh bras* (16 gwech) *Liorzh kreiz* (2 wech) *Liorzh uhellañ* (4 gwech) *Liorzh izellañ* (6 gwech) *Liorzh meur* (5 gwech) *Liorzh nevez* (2 wech) *Liorzh pellañ*,

Pe gant un anv den : *Liorzh Adam, Allain, Andre, Ar Rouz, Ar Sant, An Treut, Balkou, Beaudour, Beligogne, Beskond, Bruno, Kadiou, Kored, Kolard, Komandant, Dornes? Foulon, Geffroy, Jelard, Gourc'hant, Gwezennec, Guiader, Guyader, Hamo, Herve, Hery, Jaffrae, Jamin, Jaouen, Jekel, Lojiou, Julie, Mark, Mari Toupin, Michæl, Minter, Nicol, Olivier, Ollier, Pierres, Pipi Krok, Raoul, Raoulic, Rolland, Roudot, Stefan, Tasel, Thomas, Tual, Toupin, Triko ...*

Pe diouzh al lec'h m'emañ : *Liorzh al leur* (9 gwech) , *Liorzh ar c'hoad, Liorzh an drek, Liorzh ar forn* (2 wech) , *Liorzh an hent, Liorzh al laez , Liorzh ar plouz, Liorzh ar porzh* (3 gwech), *Liorzh ar puñs, Liorzh an traoñ, Liorzh an ti* (13 gwech), *Liorzh an ti kozh, Liorzh an ti devet, Liorzh an c'hrañj, Liorzh kroashent, Liorzh drek an ti, Liorzh lez ilis, Liorzh park ar vilin , Liorzh kilbenn , Liorzh ti bihan, Liorzh traoñ c'hrann , Liorzh ar vilin...*

pe vefe kenstag ouzh ur menaj resis : *Liorzh an Amour, liorzh an Eales?, Liorzh ar c'hure, Liorzh al Loued, liorzh an Sant (kmt ar Sant), Liorzh bras Poul ar marc'h, liorzh Koad an Hae, liorzh Koad Rannou, liorzh kozh Karadeg , liorzh Dore, liorzh flaker , liorzh garig, liorzh Gwazh an gag , liorzh Kerelo, liorzh Kerfubu, liorzh Kergevel, liorzh Kerilis, liorzh Kerleo, liorzh Kerlaouenan, liorzh Kerlider, liorzh Keroajus, liorzh Kervareg, liorzh Kervod, Liorzh Porzh ru, Liorzh Poulfank, Liorzh Run Peron, liorzh Skav Bihan bihan/bras, Liorzh Ti Breder, Liorzh ti glas, Liorzh ti poaz , Liorzh faou ...*

liorzhoù all : *Liorzh an Gwenn* (D 553), *Liorzh an C'harv* (A 775), *Liorzh an heroter* (A 883), *Liorzh an honor pe hi nor* (C 172), *Liorzh an memor* (A 1101), *Liorzh ar Rouan* (C 517), *Liorzh ar seven* (A 507), *liorzh ar vagaderez* (A 158), *liorzh bleun* (D 410), *liorzh bleun bihan* (C 112), *Liorzh burluec* (B 915), *Liorzh morgoad* (B 247), *Liorzh paoulo?* (C 416), *Liorzh Portel* (D 545), *Liorzh scafseo* (D 1154), *Liorzh trenchot* (C 510)...

N'ez eus liorz ebet kenstag ouzh ar ger « koumanant » , daoust ma'z eus ul lodenn vras oute zo d'ndan lizhiri-koumanant . N'ez eus meneg ebet eus talvoudegezh an douar (gleb , pounner , yan , ...) rak n'ez int nemet douaroù eus ar re wellañ . Kavet e vo meur a wech lodennoù kenstag ouzh ar ger « liorz » : *Park al liorz* (D 735) , *Logell al liorz* (D 1157, A 869, A 461, D 450...), *Jardin al liorz* (D 88, A 564, B 380, C 38, B 23), *Prad liorz* (A 62, D 586), *Tachenn liorz* (B 107, B 1086-1087-1088, D 775-776, C 304, C 277) , *mezeg al liorz* (B 356, D 1200, C 874, A 218, A 656, D 470)... Da lavarout e verk en un doare renk kentañ al liorz war al lodennoù all (park , logell, gwezeg, maez, tachenn , ...)

Anv a zo eus liorzhoù Langoad en dielloù kosoc'h: Er skridoù goude marv hon eus kavet : e 1706, 1733, 1740, *Liorzh an ti bihan, liorz bras an ti kozh, Liorzh mochet?* , *Liorzh ernod, Liorzh ar beskond, Liorzh Jelar, Adkavet e 1836 war bouez unan mochet (moched ?)*

Al liorz a zo lodenn pennan pep menaj : *kenstag ouzh an ti , labouret ingal, trempet aketus hag ingal , stuziet a zoare, gant an gwellañ gounidoù a c'heller kaout ha kement a bourveziñ east*

eus ar re welañ da werzhañ .Pal al liorz eo asuriñ ar menaj en ur gellout kaout peadra da ober arc'hant .

N'eo ket « ur jardin » pe vefe jardin ar menajer pa z'eo ar jardin labour merc'hed ar menaj (ar pezh a gas d'ar rapañ al labour e pep tiegezh) , ne vefe jardinoù zo gouestlet da gaout had evit ar bloavezh o tont. Gant kresk menaj-mañ-menaj , dre kenstagañ menajoù bihanoc'h ouzh ar re greñvoc'h, e vo 2, 3, 4, 6 liorz dindan perc'hentiezh pe dre lizher-goumanant (lizher-feurm) gant ur menaj e-unan.

Notenn gant F K:

N'on ket a-du gant ar ster a roez da « liorz » .

liorz : krennvrezhoneg « liorz » , henvrezhoneg « lub » + « gorth » (evit enclos à plantes : potager ; ster kentañ)

Ar ger « jardin » ne vo ket anezhañ evit al legumaj da gentañ...deuet eo ar ger galleg evit al lec'h ma vez kavet bleunioù, leton, ..ur jardin diduamant. N'eo nemet e-kerzh an 19vet eo deuet ar jardin un tamm logell « gounezet gant ar merc'hed » evel ma levez ha labouret hep ostilhoù bras. Dre ma vrasae ar menajoù eo deuet al liorzhoù da vezañ brasoc'h ha labouret gant ostilhoù bras hag e vez gounezet enne ar pezh a ranker kaout da vegañ an tiegezh, ar vevelien hag ar mitizhien. Ma oa legumaj en tu all d'ar red , d'an ezhommoù , e c'helle bezañ gwerzhet. Pal kentañ al liorz eo kaout peadra da vegañ an holl a vo 'chom en ti .

An diforc'h a zo d'ober etre « orin » ar ger hag e dalvoudegezh micherel

4- Prad, Pradenn

Tachenn douar dindan yeot evit ma vefe peuriñ d'ar saout pe kezeg, da gaout foenn evit ar goañv .

Diwar an 331 "prad" e kaver er parrez , 243 oute a zo renablet evit bezañ prajeier : 15 patur, 57 douar-labour , ar peurrest zo dioute lann pe bod pe gwern.

Diforc'hioù bras zo kenetreze : ar prad brasañ a ya da 43990m² evit ur priziadur uhel a 158,36f. Meur a re all zo etre 15000m² ha 20000m² enne. Eus an tu all zo ivez prajoù bihan etre 200m² ha 300m². Gorread keit "ar prad" zo da 3626,94m² ha priziet 11,56f, ar pezh a verk un dalvoudegezh uhel awalc'h.

Kavet vo "prad" 18 gwech e-unan hag ar ger "pradenn" 9 gwech. Tu zo rannañ anezho diwar al lec'h m'emaint, pe ar perc'henn pe menajer pe c'hoazh diwar elfennoù all ... Un toullad mat dioute zo bihan, braz; lod all meur, creis, huellañ pe izellañ , hir , don, tric'horn, moan, ...

Lod zo kenliammet gant ul lec'h : prad + park ar porzh, hent, an feunteun, ar forn, ar c'hardenn, an jardin, al lanneg, al liorz, ar wazh, ar pont, ar vilin, ar stang, an traoñ pe traoñ , ar maezioù..., drek an ti, an isu, tossen, ar c'hastel, gwerniek, ...

Lod all zo kenliammet gant un anv-den pe ur geriadenn pe menaj : prad + An Amour, Ar Bailh, An Dimezel, An Eskob, Ar C'hozh, An iliz, Ar Run, An triko, Ar Flem, Kerhualo, Pont Goter, Pont Soubenn, Koatarel, Koat Gwigour, Koad Goneri, Kmt Bihan, Kmt Lucaz, (ral eo kavout ar ger convention/ koumanant evit ur park), Krec'h Ar Bleiz, Dofin, Gwazhkev, Gindi, Huon, Kerverder, Kerelo, kerhy, Juged, Kerlastr, Kerojel, Kerwerziou, Lezeven, Lann Moris, Lann Kambleg, Lapig, Menguy, Milin gwenn, Milin Moal, Parlamant, Pont koad, Pont Poiez, Porzh Ru, Kilioù , Roudot, Runelo, Rostren, Villebasset, Jezekel , Tro Yeodi, An Deu, Toupin, Ti Glas,

Ar re diwezhañ e liamm gant elfennoù all : kezeg , ar c'hoefñs, ar marc'h, aven (douar labour) , loreo, brein (4 gwech), beg, fall, juli, loued, loÿau, mouar, pabu, olu(Jolu), roagnon, sec'h, , ...

5- Maez(ioù) (kavet gant ar skridoù: mez,mezo,mezau,mezec,mezou, mezoyo, maez, maezo, mahezo)

Kavet eo bet 119 gwech gant ur gorread-geit a 6135m² hag un dalvoudegezh etre a 17f : da lavarout dre vras parkeier bras awalc'h ha priziet mat (trempet ha labouret ingal). Brasañ hini dioute a ra 27430m² ha bez ez eus 18 "maez" gant ouzhpenn 10000m² douar enne. Ar maezioù zo alies dre strolladoù meur a hini asamblez krennet gant kleuzioù izel , peurvuañ ar re-mañ parkeier ar re bellañ eus ar menaj. Un toullad oute zo e liamm gant "tachennoù" kenstag oute.

Astennet e vez ar ger "maez" en ur reiñ da c'houzout gant peseurt menaj emañ (Huet, Keranton, Krec'helan, (Ker)elo,...) pe lec'het (Pont Poyez, St yves, milin ..) . Gant ma vez meur a "vaez" gant ar memes menaj e vo diforc'hiet gant ar gerioù (bihan, bras, kreiz, izelañ uhelañ...) . Ur wech (maezioù ar c'hazh) e seblant bezañ anvet diwar ar pezh vo plantet er park (kazh zo un ouen patatez). Ar maezioù 'zo labouret gant menajoù bras rak e oa dav kaout kezeg ha tud evit labourat gorreadoù douar ken bras, douaroù gouestlet da c'hounidigezhioù da werzhañ (ed, patatez, ...)

Notenn gant F K :

Da gentañ e oa ar maezioù, tachennoù digor , ar c'hontrol eus park a oa serr.

an maezou A 557 *ar maezioù*

maezo A 32 *maezioù*

maezo st yves A 24 26 28 30 *maezioù sant Erwan*

mezo st yves A 91 *maezioù Sant Erwan*

maezo bian A 720 *maezioù bihan*

mezo morhoat A 725 *maezioù morgoad*

mezo an hure A 726 727 *maezioù ar c'hure*

mezo croas A 768 769 *maezioù ar groaz*

maezo huet A 1022 1023 *maezioù Huet*

maezo poulivet A 1080 1081 1082 1096 *maezioù poulived*

mez hir A 513 514 *maez hir*

mezo an caro (pellan , tostan) A 647 682 683 *maezioù ar c'harv*

maezo bras B 693 *maezioù bras*

maezo briniou B 266 267 268 *maezioù briniou*

maezo gouée B 47 *maezioù gouez*

maezou guer B 108 *maezioù ar gouer*

maezou izellan B 158 *maezioù izelañ*

mez allain guillou B 603 604 *maez Alan Gwilhou*

mez ar gazeg B 649 *maez ar gazeg*

mez briand B 589 597 *maez Briand*

mez izellan B 602 *maez izelañ*

mez Kivoallan B 575 576 *maez Ker Rivoalan*

mez meur B 572 *maez meur*

mez meur B 895 *maez meur*

mez tual B 382 *maez Tual*

mezau haëllec izellan B 159 *maezioù Haeleg izelañ*

mezou haëllec huellan B 160 161 *maezioù Haeleg uhelañ*

mezoyo(u) B 1012 1013 *maezioù*

mezo bian B 692 *maezioù bihan*

maezo milin C 384 385 386 387 *maezioù ar vilin*

maezo an goff C 233 234 269 *maezioù ar gov*

maezo Knilis C 356 357 *maezioù ker an iliz*

maëzo ty nuon C 241 244 245 246 *maezioù ti an huon*

mez abèr C 102 *maez ????? (e koad arel)*

mez an guer C 166 *maez ar gouer*

mez elo Ç 848 *maez elo*

mezec huellan, izellan C 900 901 *uhelañ, izelañ*

mezo crec'helan C 314 315 319 320 321 325b *maezioù krec'helan (krec'h al lann??)*

mezo coquin C 347 *maezioù kokiñ???*

maez bras D 330 331 332 *maez bras*

maez meur D 291 292 293 294 295 *maez meur*

maez queo D 328 329 *maez kev*

maezo an bily D 777 *maezioù an Bili (Bili : Anv familh ,)*

maezo bian D 171 172 *maezioù bihan*

maezo bras D 169 170 173 174 *maezioù bras*

maezo crec'h mein D 167 168 *maezioù krec'h mein*

maezo garo D 851 852 *maezioù gavr (pe garo)*

maezo creis D 1056 *maezioù kreiz*

maezo haz D 1053 1054 1055 *maezioù ar c'hazh*

mahezo haz izellan D 1050 *maezioù ar c'hazh izelañ*

maezo haz bian, bras D 1061 1064 *maezioù ar c'hazh bihan/ bras*

maezo huellan D 1057 *maezioù uhelañ*

maezo mein D 199 200 *maezioù mein*

maezo pont boyes D 1051 1052 *maezioù pont poiez*

mez Huet traou, bian, bras, crec'h, creis huellan D 737 738 740 741 742 743 744 *maez Huet traouñ bihan, bras, krec'h, kreiz, uhelañ*

mez geranton bian, bras D 699 700 *maez Keranton bihan, bras*

mez guer izellan, huellan D 753 756 *maez ar gouer izelañ, uhelañ*

6- Lann Lanneg skrivet : lan, lann, lanne, lannec, lanec, lanneyer, lanneyero, lanno

101 "lann pe lanneg" renablet da zouar labour pa n'ez eus nemet 62 renablet da zouar gwrac'h : 582120m² a "lann labour" evit 273090m² a "lann gwrac'h" hervez ar c'hasdastr e 1836. Gorread keit al "lanneg labour" (5763m²) zo un tamm brasoc'h eget hini al "lanneg-gwrac'h" (4404 m²) met an dalvoudegezh -keit zo teir gwech uheloc'h (9,23f evit 3,11f) . E Langoad, ne oa en holl nemet 385000m² a douaroù gwrac'h e 1836 (ar re-mañ gant an anv "lann pe lanneg" ha lod all gant anvioù all) ar pezh a zo 2,18% eus an douaroù, da lavarout nebeut ker. Ar pezh a zo kazaus eo ne ouzer ket petra a dalvez ez-resis "lann" evit paotred ar c'hadastr: tachennoù-douar "gwrac'h" (difraost ha leusket da vont) ; tachennoù-douar hadet gant lann-pil (anvet "pilienn" gwechoù zo), gant lann-med (pe ivin) pe lann-tan? En 20ved e vo hadet lann-pil war ar c'hleuzioù, boued kezeg anezhañ ur wech pilet .

Daoust da-se al lanneier labouret n'int ket eus an douar fallañ , gwelloc'h hag ar re anvet "tachenn" pe logell" . kavet e vezont ivez dre rummadoù gant ar memes anv : *Lann bras Lezeven* (B 623 624 626 627), *Lanneg Moris* (B 1043 1044 1045 1054 1055 1056 1057 1058); *Lanneieroù Kambleg* (C 57 58 59 60) , *Lanneieroù Chantiri* (D 1211 1212 1213 1214) ingal douar-labour ha douar-gwrac'h dioute.

Resisaet e vez al "lann pe lanneg" gant al lec'h m'emañ (Klast, Camblec, Pont Boyes, Lezeven, Kerikun, Kerhualo, ar stang, an chapel, ar groaz, roz ar pont ...) gwechoù all ral awalc'h gant anvioù tud (Baronez, Rinviere evit Rinier, Moris,...) pe gant perzhioù all (kerc'h , mouar , korn, ar c'hog, an dosenn, ar maout, mein gwenn, poull du ...) "park lammer" evit *Park lann meur*(D760)

Lec'hiet peurlvuiañ war roz , diribin , diskenn un draoniennig pe ur saonenn

An lanne	D533	L	6560	16,4
An lannec	B1062	L	1950	3,13
An lannec	B1063	lan	1960	1,37
An lannec	B1065	lan	3120	1,25
An lannec	B1064	lan	6990	4,9
An lannec	B1060	lan	2270	5,68
An lannec	A1045	lan	1030	1
An lannec	D1026	lan	2960	2,96
An lannec	B1061	pre	2560	1,79
An lannec	C126	L	3330	3,33
An lannec	C930	lan	2810	1,97
An lannec	B715	lan	3070	2,15
An lannec	B676	lan	3470	3,47

An lannec	C124	lan	9270	6,49
An lannec	C592	lan	7310	6,21
An lannec	D833	L	8610	21,52
An lannec	D1016	lan	2510	1,76
An lannec	C125	lan	6450	2,58
An lannec	C634	L	6600	10,56
An lannec	D1025	pat	640	0,38
An lannec	D854	L	1810	2,92
An lannec	D850	lan	8840	6,19
An lannec	D792	L	5300	8,48
An lannec	D835	lan	3950 1;58	
An lannec	C928	lan	9320	6,52
An lannec	B714	lan	6210	4,35
An lannec	A610	L	4670	14,94
An lannec	A885	L	4450	11,12
Lan bian	B619	L	1120	1,79
Lan bian	B618	pat	670	0,13
Lan bian lezeven	B631	lan	4150	2,9
Lan bian mein gouen	C1002	lan	720	0,29
Lan bras camblec	C66	L	4090	4,04
Lan bras lezeven	B624	lan	1560	0,63
Lan bras lezeven	B623	L	3390	5,43
Lan bras lezeven	B627	lan	3770	2,64
Lan bras lezeven	B626	Lan pla	2720	1,9
Lan camblec	C340	lan	5370	2,15
Lan creis	C724	L	8350	10,85
Lan Khualo	C701	L	9750	15,6
Lan parc meur pellan	A875	L	3770	6,03
Lan parc meur pellan	A874	L	6690	16,73
Lan pont boyes	D1076	L	4890	7,82
Lan querc'h	C671	L	3990	6,39
Lan traoulan	D276	pre	2880	6,9
Lan traoulan	D275	L	2040	3,2
Lan traoulan	D277	L	2730	4,37
Lanec morice	B1054	Pat	370	0,26
Lanec morice	B1057	L	6290	10,06
Lanec morice	B1056	lan	1080	0,76
Lanec morice	B1058	lan	5960	4,17
Lanec morice	B1055	L	5600	8,96

Lann camblec	C61	lan	8220	5,7
Lann camblec	C55	L	5200	8,2
Lann camblec bras	C63	pai	1080	0,2
Lann camblec bras	C64	L	2180	2,2
Lann camblec bras	C65	L	2090	2,2
Lann camblec bras	C62	lan	2670	1,5
Lann bras	C996	lan	17940	7,4
Lann bras camblec	C68	pre	650	1,5
Lann bras camblec	C69	L	950	0,9
Lann camblec	C305	L	3650	3,65
Lann camblec	C306	L	7390	11,82
Lann camblec	C303	L	3450	5,52
Lann corn	C140	lan	7180	5,03
Lann Klast	B1068	lan	2560	1,79
Lann Klast	B1066	L	2100	2,1
Lann Klast	B1069	lan	2720	1,96
Lann Kuzannou	A689	L	7260	11
Lann Kuzannou	A688	lan	1140	1
Lann Kuzannou	A686	futaie	1870	3
Lann Kuzannou	A687	L	3020	4
Lann Kuzannou	A690	L	7950	12
Lann meur bras	A873	L	10220	25,55
Lann zuil	B1026	L	9050	14
Lann zuil	B1014	L	6750 16?83	
Lannec an bosse	D371	L	3630	5,82
Lannec an chapelle	A284	pla	2050	3
Lannec an chapelle	A297	L	1490	3
Lannec an coq	B891	lan	6490	4,54
Lannec an coq	B144	lan	1080	0,76
Lannec an coq	B145	lan	250	0,1
Lannec an coq	B139	L	4170	10,42
Lannec an coq	B146	L	7370	15,11
Lannec an croas	C737	lan	7050	7,05
Lannec an deu	C587	L	6940	11,1
Lannec an hend	C987	lan	360	0,25
Lannec an maout	B744	lan	2170	1,42
Lannec an maout	B745	L	6630	6,63
Lannec an maout	B743	L	7900	12,64
Lannec an stang	C984	lan	6980	4,89

Lannec an tavignon	C639	L	9210	9,21
Lannec andreo	B1129	L	2350	5,87
Lannec andreo	B1128	M S	120	2,48
Lannec barones	A764	L	5990	14,98
Lannec bian	D793	L	3920	6,27
Lannec bian	D642	pre	2040	4,9
Lannec bian	D670	lan	6010	4,2
Lannec bian	D534	L	4580	7,33
Lannec bian	D686	L	5520	17,6
Lannec bourhis	D428	L	6730	13,79
Lannec bras	D1208	pat	740	0,46
Lannec bras	C543	L	8920	14,27
Lannec bras	C899	L	13420	13,42
Lannec bras	D388	L	3810	6,1
Lannec bras	D387	L	3500	5,6
Lannec bras	D1205	lan	8630	6,04
Lannec bras	D712	L	10170	16,27
Lannec bras	C766	L	13950	22,32
Lannec bras fanten caer	D1217	L	2980	4,77
Lannec bras fanten caer	D1216	L	2980	4,77
Lannec chopinade	C680	pat	790	0,79
Lannec chopinade	C679	lan	7040	4,93
Lannec crec'h	A99	lan	970	0,68
Lannec crec'h	A98	L	4190	10,48
Lannec creis	D390	L	6200	9,93
Lannec croas hend	C476	L	7700	12,32
Lannec ezéouan	D1152	L	9570	23,92
Lannec fal	C914	L	7380	11,82
Lannec fanten caer	D1218	L	3000	4,8
Lannec fanten caer	D1219	pre	3240	7,78
Lannec foricher	B923	L	5830	9,33
Lannec housin	C1000	lan	5410	2,9
Lannec huellan	C541	L	8490	13,58
Lannec izellan	C163	L	4260	6,82
Lannec jacques	D431	L	6500	10,4
Lannec Khualo	C716	L	12950	20,73
Lannec Kicun	C168	L	5340	8,54
Lannec kicun	C516	L	6660	10,66
Lannec Kjegu	C338	lan	5990	4,19

Lannec Kojel	D1058	L	2350	2,35
Lannec landeos	D439	L	6570	10,5
Lannec lezeven	C623	L	4010	6,41
Lannec lezeven	C619	L	2910	4,65
Lannec mein	A39	lan	6620	2,65
Lannec mein gouen	C988	lan	12360	4,9
Lannec moan	C898	L	11270	11,27
Lannec morice	B1044	L	3730	5,9
Lannec morice	B1043	L	5780	9,25
Lannec morice	B1045	lan	1090	0,7
Lannec mouar	D1078	L	1140	1,14
Lannec pellan	D1221	L	7340	11,74
Lannec poul du	A1047	L	7030	11
Lannec poul du	A1048	lan	310	0,2
Lannec poulivet	A1066	L	6080	15,3
Lannec prat	D1148	L	5170	8,27
Lannec prat	D1149	pat	2640	2,64
Lannec prat	D1215	L	8140	13,02
Lannec prat	D1151	L	9530	15,25
Lannec prat	D1150	lan	6520	4,56
Lannec quelleno	C744	L	2800	4,42
Lannec rinviere	D1081	L	2150	3,44
Lannec ros an pont huellan	B152	lan	680	0,47
Lannec roz an pont	B143	lan	2880	2,02
Lannec roz an pont huellan	B151	lan	4150	10,37
Lannec roz an pont izellan	B150	L	3820	12,22
Lannec runelo	C529	L	10060	10,06
Lannec tossen coat	D1080	L	5670	9,07
Lannec tostan	D1220	L	5240	5,24
Lannec trohorre	D53	L	5870	5,87
Lannec vos an pont	B29	Lande	3330	1,33
Lanneyer camblec	C88	L	3420	3,42
Lanneyer camblec	C90	L	4830	4,83
Lanneyer camblec	C89	L	2800	2,8
Lanneyer Klast	C635	lan	8710	8,71
Lanneyer Klast	C636	lan	8720	8,72
Lanneyero	D1207	L	3570	5,7
Lanneyero	D1210	pre	850	1,19
Lanneyero	D1206	L	6450	10,32

Lanneyero	D1209	L	850	1,36
Lanneyero camblec	C58	lan	3370	2,2
Lanneyero camblec	C59	lan	2000	1,6
Lanneyero camblec	C57	L	4600	4,6
Lanneyero camblec	C60	lan	2040	1,6
Lanneyero chantiry	D1214	L	2900	2,9
Lanneyero chantiry	D1213	lan	600	0,24
Lanneyero chantiry	D1211	lan	900	0,36
Lanneyero chantiry	D1212	pre	2690	6,45
Lanno meur	A895	L	9370	26
Parc lammer	D760	L	5860	9,38

Notenn:

1- Klast evit Kerlast , Kikun evit Kericun, ...

2- Lanneg Kerhuajou pe Gwialou e Plouvagor "Pont Gwialo" a vez distaget "Pont Kualp"

3- Sellout ivez el lpdenn "Plant" evit ar ger "lann"

7- Tachenn

Tachenn: lodennigoù o paouez bezañ difraostet (abaoe un tamm amzer zoken) hag a vez labouret kement ha dont da vezañ douar-labour

90 lodenn-douar renablet gant an anv "tachenn" evit ur gorread-keit a 2901m² gant an dalvoudegezh a 6,48 f. Evit ul lodenn vras oute e vezont dre rummadoù, ar memes anv gante, stok-a-stok. Renablet int bet da douar labour evit al lodenn vrasañ oute . Kenstrollet int a takadoù, gwechoù zo ouzpenn 10 tachenn kichen ha kichen : rummad D 95 ; D486 ; C204 ... Al lodenn vrasañ dioute zo e liamm gant ar ger "maez" pe "maezioù" un nebeut ouzh ar ger "park" pe "liorz".

An "dachenn" zo peurviañ hir ha moan , ur c'hleuz izel awalc'h a gas d'an eil dachenn kenstok. Ar rummad tachennoù zo frammet evel koreennoù an eil e kichen eben . Merkout a ra an doare da zisfraostañ douaroù bet dilezet, pep skipailh pe den o vont gant e ledander o tifraostañ hag o verniañ a bep tu eus e lodenn kement a sevel ur c'hleuz . Da c'houde vo tennet gounit gante eus an dachenn-mañ en ur hadañ pe lann-pil, pe segal, pe kanab..

tachen mezo morhoat : A 713 714 715 716 717 721 *Tachenn maezioù morgoad*

tachen hery gallou : A 648 679 680 *Tachenn Heri Galloù*

tachen pierre ? : A 550 *Tachenn Per*

tachen an liors : B 107 *Tachenn al liorz*

tachen an mouden : B 555 *Tachenn ar vouden*

tachen behec : B 522 *Tachenn Beheg?*

tachen Kmelegan ; B 645 646 *Tachenn Kervelegan*

tachen parc louedec : B 681 *Tachenn Park Louedeg*

tachen liors : B 1086 1087 1088 *Tachenn al liorz*

tachen mez stang ar groac'h : B 583 584 585 586 *Tachenn maez Stank ar gwrac'h*

tachen mezo : B 483 484 487 488 489 *Tachenn ar maezioù*

tachen parc raoulic : B 233 234 *Tachenn Park raouleg (pe Raoulig eus an anv-den Raoul)*

tachen mezo gouerniou : C 71 72 *Tachenn maeziou ar gwernioù*

tachen an nestan(nissan?) C 197 *Tachenn an nesañ*

tachen besquellec : C 220 *Tachenn veskellek*

tachen melen aven : C 215 *tachenn melen aven*

tachen an neftes? : C 198 *Tachenn an*

tachen maezo : C 204 205 213 214 216 217 218 219 *Tachenn ar maeziou*

tachen parc fao : C 300 301 *Tachenn park ar faou*

tachen mezo crec'hlan : C 322 323 324 *Tachenn maeziou Krec'helan*

tachen liors gourhan : C 304 *Tachenn liorz Gourc'hant*

tachen liors ty poas : C 277 *Tachenn liorz ti poazh*

tachen maezo goff : C 231 232 *Tachenn maeziou ar Gov*

tachen maezo Knilis : C 352 353 354 *Tachenn maeziou Kerniliz*

tachen mez erle : C 584 585 *Tachenn maez erle (park mezerel e 1744)*

tachen vone/c : C 1016 *Tachenn Von*

tachen an trau : D 633 *Tachenn an traoñ*

tachen crec'h bian : D 214 215 *Tachenn krec'h bihan*

tachen maezo : D 95 96 97 98 99 100 101 102 103 *Tachenn ar maeziou*

tachen maezo : D 486 487 488 489 490 491 492 493 508 509 510 511 512 513 514 515

8- Koad, Koadig (coat, coadic)

Dindan ar ger "koad" e kaver meur a dra : menajoù (*Koad Rannou, Koad An Roc'h, Koad Ar Faou, Koad Gwigour, Koad Gwezenneg, Koad Mahe, Koad an Hae*, Bois de la Haye) ar re-mañ o tennañ oc'h anv, marteze, dre ma'z int bet savet e-kichen ur c'hoad bennak.. hag a zo bet implijet da goad prenn evit sevel an ti hag ar savadurioù , eil-tiez ar menaj. Dav merzout war an dro, gorreadoù an tiez ha live an dalvoudegezh evit pep hini oute .

Ar parkeier kavet gant an anv "koad" 'zo dre vras 3 rummad oute : diwar ar 54 daveenn ez eus 23 douar-labour pe prad , 15 all koad-uhel da lavarout bet plantet evit koad-prenn ha 15 brouskoad pe koad-med laosket da vountañ evel ma teu gante. Da 4194m² e sav keidenn o gorread gant un dalvoudegezh izel a 6,65f (war bouez tri pe pevar oute a labour douar hag a zo priziet mat) . Parkeier zo zo gante daou pe dri devezh arat douar , douar-labour war- bouez unan hag a zo koad-uhel ennañ . N'eus ket a goadeier da vat e Langoad , gouestlet an douar da vezañ labouret abaoe pell amzer ; ar c'hleuzioù hag al lannoù eo hag a vo implijet da bourvezañ ar c'hoad-tan pe prenn ezhomm gant an dud .

Ar c'hoad, Koad an alez, Koad ar chapel, Koad ar C'hozh, Koad halleg, Koadig an heskenn, koadig al lae, Koad traoñieroù, Koad raden, Koad bihan park ar groaz , Koad ar vilin, Koad Krec'h ar C'hozh, Koad Saoz ... (anv familh langlais e roll ar berc'hennerien)

Ad coat	B823	futaie	3060	3,04
An coat	B678	L	4290	6,57
An coat	B733	lan	400	0,28
An coat	B682	futaie	3560	3,56
An coat	B679	Lan	770	0,56
An coat	D91	taillis	4440	7,1
An coat	B734	L	1960	3,14
Coat an allée	C1004	taillis	2780	2,78
Coat an chapelle	A296		6170	9
Coat an chapelle	D1198	taillis	8050	12,88
Coat an chapelle	A294	L	2800	4
Coat an coz	B638	fut	2220	2,22
Coat an coz	B641	tail	2030	3,25
Coat an coz	B639	fut	2220	2,22
Coat an coz	B640	taillis	2030	3,25
Coat an entree	A465	Fut	460	0,74
Coat an jardin	D535	L	6050	15,13
Coat an lannec	A472	L	10400	10

Coat an lannec	A471	pat	2720	2
Coat an vilin	D836	L	10360	10,36
Coat an vilin	C1038	taillis	6450	6
Coat bian	D1	L	4390	10,98
Coat bian	D8	L	4360	10,9
Coat bian	C80	L pla	450	0,72
Coat bian	D551	taillis	3230	3,23
Coat bian	B803	L pla	1170	3,74
Coat bian	C843	L	4190	6,7
Coat bian	A348	fut	2200	2
Coat bian parc croas	B809	L	710	1,14
Coat bian parc pors	A1100	K	1300	5
Coat bian traourout	D848	taillis	2840	4,55
Coat boulon	B632	futaie	1980	1,98
Coat boulon	B633	futaie	2630	2,63
Coat bras	D781	L	4120	10,3
Coat bras coz caradec	A829	L	7940	16,25
Coat crec'h an coz	B999	taillis	9770	12,69
Coat crec'h leac'h	B1001	futaie	7840	7,84
Coat creis	B834	futaie	950	0,95
Coat dialay	A552	pat	2680	0,54
Coat dreg creis	A484	L	10630	26
Coat dreg pellan	A485	L	15900	39
Coat dreg tostan	A483	L	10880	22
Coat Gonery	C1047	taillis	3920	3,92
Coat halec	B740	L	4000	6,4
Coat halec	B766	aulnaie	340	0,24
Coat Kes	B995	futaie	12660	16,46
Coat liors	C972	futaie	380	0,38
Coat pellan	B835	fut	1290	1,29
Coat prat an traou	A503	fut	1100	1,76
Coat raden	D1031	L	3080	7,7
Coat saux	C377	pre	1760	4,22
Coat saux	C376	lan	1060	0,74
Coat trauyero	D583	futaie	600	0,6
Coadic an esquen	C764	L	1200	1,2
Coadic an lay	A501	L	6260	20,03
Bois de la haye	B304	M S	220	4,88
Bois de la haye	B303	M S	200	8,8

Bois de la haye	B302	B	100	0,4
Coat rannou	A136	MS	200	2
Coat rannou	A139	MS	80	6
Coat rannou	A137	MS	160	2
Coat mahe	B86	M S	340	5,36
Coat mahe	B85	M S	300	21,2
Coat guezenec	A755	M S	60	4,5
Coat guezenec	A613	M S	800	15,2
Coat guigour	A329	B	70	0,2
Coat guigour	A328	MS	560	18,2
Coat croas	A563	M B S	900	23,6
Coat croas	A544	M S	280	25,1
Coat croas	A541	B	210	0,5
Coat croas	A545	B	210	0,82
Coat ar fo	A305	MS	700	32
Coat an fo	A304	B	350	1
Coat an fo	A308	MS	270	3,68
Coat an roc'h	A110	MS	140	6,56
Coat an roc'h	A111	MS	460	7,84

9- Kloz ar c'hloz

Kloz : tachenn-labour priziet mat kaer, kelc'hiet tro-dro gant kleuzioù warne gwez plantet evit koad-prenn ; douar labouret ha trempet mat.

Kas a ra ar c'hloz d'ur gorread-keit a 5789m² priziet gant an tailhoù da 19,86f , ar pezh a zo ur priziadur uhel (a eil renk goude hini al liorzhoù) : Douar mat ha trempet a zoare ha labouret evit kaout ed dreist-holl , diouzhtu e-kichen ar menaj . Eus 740m² evit ar bihanañ da 22130m² evit ar brasañ hini . An anv "kloz" ne zeu ket eus diouzh perc'henniezh ar c'hleuzioù tro-dro dezhañ met dre ma z'eo sterniet gant kleuzioù gant gwez uhel tro-dro dezhañ (derv, onn, faou, ..) Ne soñj ket diñ e vefe gouestlet d'al loened (saout pe kezeg) dezho da beuriñ ennañ rak ne yafe ket ar priziadur-tailh ken uhel . 38 daveenn en holl

Ar c'hloz, Kloz al leur, Kloz ar C'hamm, Kloz bihan saon ar vilin,...

An hlos	C851	L	10390	33,25
An hlos	A777	L	3620	14,48
An hlos	C830	L pla	2070	6,63
An hlos	D1047	L pla	4400	14,08
An hlos	C850	L	10390	33,25
An hlos	C248	L pla	4080	16,32
An hlos	D693	L	2920	9,34
An hlos	D692	L	4850	15,52
An hlos	D245	L pla	1770	5,66
An hlos	B946	L	11420	41,11
An hlos	D1177	L pla	5490	21,96
An hlos	D861	L pla	2870	11,48
An hlos	B500	L pla	3620	14,45
An hlos	D1086	L pla	4070	13,02
An hlos	B1136	L	3470	12,6
An hlos	B1135	L	3520	12,67
An hlos	C486	L pla	740	1,85
An hlos	B205	L pla	6650	23,94
An hlos	B848	L	7920	28,49
An hlos	B729	L pla	4140	14,9
Hlos an leur	D648	L plan	6960	27,54
Hlos an leur	D1184	L pla	1860	7,44
Hlos bian	A908	L pla	3940	12,6
Hlos bian	D81	L pla	3590	11,49
Hlos bian	A330	L	9570	38,28
Hlos bian sant vilin	D588	L plan	2100	8,4

Hlos bras	B680	L	6520	16,34
Hlos bras	D645	L	12030	38,5
Hlos bras	B1007	L	11050	27,63
Clos an ham	B863	L	2220	8,88
Clos bian	B708	L	2010	6,3
Clos bian	B1006	L pla	8190	29,48
Clos bian	B443	L	1700	5,44
Clos bian	B1110	L	1600	5,12
Clos bian	A252	L	2690	10
Clos bras	B157	L	11320	36,22
Clos bras	A358	L	22130	88,52
Clos bras	A456	L	11110	31,66

Ar ystod	A311	L	432	1,74
Ar ystod	A349	L	300	1,19
Ar ystod	C012	L	8830	19,3
Ar ystod	A014	L	394	0,26
Ar ystod	A317	L	300	0,3
Ar ystod	A784	L	610	0,4
Ar ystod	B374	L	200	0,6
Ar ystod	D1200	L	400	1,1
Ar ystod	A656	L	100	0,3
Ar ystod	A218	L	70	0,2
Ar ystod	B1175	L	170	0,5
Ar ystod	D534	L	200	0,3
Ar ystod	A532	L	130	0,4
Ar ystod	A01	L	700	1
Ar ystod	A559	L	50	0,16

10- Gwezeg, ar wezeg

Gwezeg : tachennig douar gouestlet da hadañ ha sevel plant-gwez hag a vo plantet un nebeut bloavezhioù da c'houde pe er gwerjezoù pe war ar c'hleuzioù, kement-mañ diouzh o gouenn (gwez evit frouezh: avaloù, babu, per pe gwezh evit koad-labour: onn, kistin, derv, faou ...)

Da lavarout ez eus 9570m² en holl evit ur geidenn a 330m² pep hini, kement-mañ evit un dalvoudegezh-keit a ya da 0,65f, etre 50m² evit ar bihannañ da 750m² d'ar brasañ.

